


4. SANT VAUDÉ



Ar chapel en enor da **sant Vaudé** a zo eus ar 15th kantved.
Kaer eo ha frank : 60 troatad var 15.

E penestr ar c'heur, guechal liouet ol, e chom c'hoaz
daou bastel : var unan Jézus o koueza didan é Groaz, var
égilé, Jézus o sevel eus ar bé.


Sant Vaudé a vê pedet dreist ol evit ar vugalé klanv gant
kest.

Statuioù :

Sant Vaudé, sant Ian Badézour,
Ant I. V. a Drué, sant Eon,
Sant Drien hag en doa guechal eur chapel é kichen Treu-
zéva.

Pardonioù :

- 1) D'ar sul kenta libr varlerc'h Gouel ar Sakramant.
- 2) D'ar 4th sul eus miz guengolô.



zet.

DISKAN.

Pedomb gant feiz ha karanté,
Pedomb an Aotrou sant Vaudé,
Ma helimb gantan kennerzet
Var é roudou bepred kerzet.

1. Sant Vaudé breman ker brudet
E bro Irland a oa ganet;
E gérent, tud a renk ihuel,
A oa ouспен kérent santel.

2. E gérent, sklerijennet mat
E kenver deveriou o stad,
A boanié guellan ma hellent
Da gas o dek bugel da sent.

3. O sant Vaudé, dré ho peden
Sikouret ar gérent kristen
Da sevel mat o bugalé,
D'o sevel e doujans Doué.

4. En é vro, en eur manati,
Maudé a reas é studi
Hag e kavas deskadurez
Hag guelloc'h c'hoaz : guir santelez.

5. Hed ol amzer é iaouankiz
E chomas divlam e pep giz ;
D'é vignoned, da dud é oad
Ato e roé skueriou vat.

6. Ra vo iaouankiz Breiz-Izel
Ouz sant Vaudé ato henvel,
O tiouall bepred aketus
Diouz an ol bec'hejou mézus.

7. En é vro, kentiz m'eo beleg,
E poagn da goves, da brezeg ;
Eno avat ne chom ket pel :
Doué hen galv da Vreiz-Izel.

8. Daoust peger poanüs e kavé
Kuitat an ol dud a garé,
Setu ar sant treuzi ar mor
Hag dont var eün varzu Arvor.

9. E Breiz-Izel pa zigouézas,
Du-man, du-hont e prezegas,
Hag alies dré vuzudou
E oé kresket nerz é gomzou.

10. E kement lec'h ma prezegé
Niver a dud a ziredé.
Gant pebez feiz, pebez respet
Gant hon Tadou oa selaouet !

11. O sant kerc'h, greit d'imb ivé.
Selaou ervat komzou Doué,
Hag ato heulia penn-da-benn
Kentelioù mat hor beleien.

12. Beva a reas pel amzer
En eul lec'h tost da Landreger;
Da bedi, d'ober piuijen
En doa choajet eun inizen.

13. Ni evel d'oc'h, o sant Vaudé,
A boanio da bedi bemdé ;
Ni zalc'ho mat da lézennou
Ar c'horaiñ hag ar vijilou.

14. Daoust ma vevé el lec'h distro,
Eur bohl tud vizé var é dro :
Lod a zeu da glask lec'hed,
Lod al skueriou a barfeled.

15. Sant Vaudé, dré ho pedennou
Deit d'hor sikour en hon poanü ;
Goulennet vidomb gant Doué
Lec'hed ar c'horv hag an ené.

16. O tigouezout en inizen
E kavas euni a vanden
Prenved donjerus pe aered :
E beden reas d'é lec'hed.

17. Pa glask ar serpent miliget
Hag goal-hemma dré ar pec'hed,
Miret diouton, o sant Vaudé,
Da rei ar maro d'hon ené.

18. Pa zeuas ar Sant da vervel
E oa é ené ken santel
Ker brao guisket gant vertuziou
Ma savas var eün d'an neuvou.

19. O sant Vaudé, pa vimb, d'hon tro,
Skoc'h eun dé digant ar maro,
Greit ma helimb, gant ho skoazel,
Kaout ivé eur maro santel.

20. D'ho chapel gant devoñon
Omp deit da zevez ho pardon,
Da laret d'oc'h hon ezommou
Hag da veuli ho vertuziou.

CANTIQUE A SAINT MAUDE
(traduction Louis Le Mouel)

Quisiff-
8N2-1-033



Refrain :

Prions avec amour et foi,
Prions Monsieur Saint Maudé,
Qu'il nous accorde son appui
Et nous permette de le suivre toujours.

- | | |
|--|--|
| <p>-1-
Saint Maudé, maintenant fort connu,
Est né au pays d'Irlande;
Ses parents étaient de haute lignée
Et, de plus, de fidèles chrétiens.</p> <p>-2-
Ses parents, bien éclairés
Sur les devoirs de leur état,
Voulaient aussi, de leur mieux,
Faire de leurs enfants des saints.</p> <p>-3-
O Saint Maudé, que votre prière
Vienne en aide aux parents chrétiens
Pour que leurs enfants soient bien élevés
Et instruits dans le respect de Dieu.</p> <p>-4-
C'est dans un monastère de son pays
Que Maudé fit ses études.
Il y reçut un bon enseignement
Et, mieux encore, une véritable sainteté.</p> <p>-5-
Tout au long de sa jeunesse,
Il sut rester pur de corps et d'esprit.
A ses camarades, comme aux adultes,
Il était toujours de bon conseil.</p> <p>-6-
Que la jeunesse de Bretagne
Reste semblable à Saint Maudé,
Qu'elle ait toujours le souci
De se garder des péchés honteux.</p> <p>-7-
Devenu jeune prêtre en son pays,
Il ne cesse de confesser et de prêcher;
Mais il n'y reste pas longtemps
Car on l'appelle en Basse-Bretagne.</p> <p>-8-
Malgré la souffrance qu'il éprouve
A se séparer de ceux qu'il aime,
Le voici qui traverse la mer
Et se dirige tout droit vers l'Armorique.</p> <p>-9-
Dès son arrivée en Basse-Bretagne,
Il se mit à prêcher çà et là,
Et, bien souvent, des prodiges
Renforçaient le poids de ses paroles.</p> <p>-10-
En tous lieux où il venait prêcher,
Les gens accouraient en foule.
Avec quelle foi, quel respect,
Nos aïeux venaient l'écouter.</p> | <p>-11-
O Saint Maudé, faites que nous aussi
Sachions entendre les paroles de Dieu
Et suivre toujours, sans rien omettre,
Les bons conseils de nos prêtres</p> <p>-12-
Il vécut ainsi bien longtemps
Dans un lieu proche de Tréguier,
Puis, afin de faire pénitence,
Il se retira dans une île.</p> <p>-13-
Nous aussi, ô Saint Maudé,
Nous veillerons à prier chaque jour;
Nous resterons fidèles aux préceptes
Du Carême et des Vigiles.</p> <p>-14-
Bien qu'il vécut loin de tout,
Bien des gens venaient cependant le voir,
Les uns cherchant à retrouver la santé
Et les autres des exemples de perfection.</p> <p>-15-
O Saint Maudé, par vos prières,
Aidez-nous à supporter nos peines.
Demandez pour nous au Seigneur Dieu
La santé du corps et celle de l'âme.</p> <p>-16-
En débarquant sur son île,
Il y avait trouvé en grand nombre
Des bêtes répugnantes et des serpents.
Par sa prière, il les fit s'en aller.</p> <p>-17-
Quand le serpent maudit
Veut nous contaminer par le péché,
Empêchez-le, ô Saint Maudé,
D'atteindre mortellement notre âme.</p> <p>-18-
Quand sonna l'heure de sa mort,
le Saint avait l'âme si pure,
Si revêtue de belles vertus,
Qu'elle monta tout droit aux cieux.</p> <p>-19-
O Saint Maudé, lorsque viendra notre tour
D'être frappé par la mort,
Faites qu'avec votre secours,
Nous ayons aussi une sainte mort.</p> <p>-20-
A votre chapelle, nous sommes pieusement
Venus, le jour de votre pardon,
Pour vous dire nos besoins
Et pour célébrer vos vertus.</p> |
|--|--|

29650 GUERLESQUIN

CANTIQUE à SAINT MAUDEZ .

Refrain - Aotrou Sant Vaudez, hor Patron,
Dalc'hit ar feiz en hor c'halon,
Feiz birvidig hon tadou koz,
Ma z'aimp ganto d'ar Baradoz.

1- Ho tad, ho mamm, tud a feiz krenv,
A zisk, aeze deoc'h hent an nenv,
En o falez, c'hoaz bihanig,
C'houi oa santel 'vel eun aelig.

2- Euz Iverzon, brema me 'vel
Eur vag, he gouel frank en avel,
O lamet war goumou ar mor,
Hag o touara en Arvor.

3- E douar Breiz, c'houi peuz hadet
Feiz krenv hag a zo diwanet,
Hag eost mad en deuz bet Doue
Da zougen da c'hrignol an Ee.

4- C'houi a zo karet en hor bro,
Dister ar vouez a lavaro
Nerz dispar ar brezegennou
Ha niver bras ho purzudou.

5- An dud klanv, an dud ma'hagnet
Dreizoc'h o deze ar iec'hed;
An drouk-spered pell a dec'he,
Hag an dud dall, sklear a vele.

6- Sant Vaudez, roit adarre
Da gement zo klanv ar pare;
Ra vo gwelet c'hoaz peb Breizad
O vale eun war en hent mad.

7- Ha peb kristen a lavaro,
En hor parrez ha tro-war-dro
En Env Zant Vaudez evurus,
War an douar zo galloudus .



=====